

AN DURZUNELL

Ar zô-man a zo bet kanet ha diskanet gwechall e kement pardon, foar
ha març'hall a oa e Breiz-Izel; an ton a zo aes da zeski ha kuer kenan.

Kalz am-zer am eus kol-let, Ti, ra
di Ian ti ra, da la la la la, Kalz
am-zer am eus kol-let o fur-chal ar c'hoajou,
O fur-chal ar c'hoajou.

Kalz am-zer am eus kollet
O fur-chal ar c'hoajou
*Vit surpren an durzunell
Kousket war ar brankou,
Skoziet em eus va fusul,
Met tennet em eus fall,
Tee'het eo an durzunell,
Ha n'eo ar c'hoajou all.

Dious an noz hag ar mintin
Me gley al laboused
O kant, o f-edoni,
Da-veg ar gwez rignet.
Ha n'eus nikun anezo
A bikle va c'halon
Evel mouez an durzunell
O oned d'he mignon.

Hirvoudi va noz ha dez
Gand ar boan, an auken.
*Vel ma-oro e kaez intanvez
Kollfet ganti he den.
Hekler he mouez klemmus
A red dre ar c'hoajou,
A zo març'bed poanuz
D'an holl labousedou.

— Petra, turzunell yaouank,
A dourmant da galon?
— Kollet em eus, emezi,
Va fidela mignon!
Ma na deu ar chaseour
D'ober d'in-me mervel
Me varvo gand ar c'hlac'har
Da va mignon fidel.

N'eus na louzou, na souten,
Na frealzidigez
Gouest da barea souden
Gouli va c'harantez.
*Trec'het oun gand ar c'hlac'har ;
Mont a ran da vervel,
Met ne varvin ket kountant
Ma ne varvan fidel. »

Gwelet em eus o vervel
An durzunell yaouank
Dizec'het piz he c'halon
Gand ar boan, an tourmant,
En he huanad diweza
He deuz c'hoaz lavaret :
« Kenavo, mignon fidel ! »
Raktal eo tremenet !

Melezour sklaer ha gwirion
Eus ar wir garantez,
Ha ne gaver e kalon
Ar yaouankiz direiz.
— Nann, nann: ne varvin lacuen,
Ma ne varvan fidel.
Ha biken ne zizonjin
Maro an durzunell.

Daslume! gant PAOTR TRÉOURÉ.